

Maria Prat :Julan 'n-eus gonezet ar « grolo »

C'hoarierien

Juluan, ar mevel, 34 bloaz

Pier, ar perhenn, 54 bloaz

Mari, e bried, 51 bloaz

Lena, o merh, 18 vloaz.

Gustav, eur paotr yaouank, 20 vloaz.

Odet, ar vatez, 17 vloaz.

Lena

(*O tonñ*, *evuruz*). Pa zoñjan petore devez kaer evidon, digemer Gustav, danvez ma fried hag a dond da 'n em gleved gand ma zud ha me diwar-benn on eured. Ma vije arru ar mevel bremañ g ar fleur ? Med peleh eo sac'het ar ruzer-ze? Da digeri e henou braz tu bennag 'vel kustum.

Mari

(*O tonñ*). Arsa, Lena, oh ober petra out aze? N'e-teus ket peurgempennet ar zal evid digeme baotr koant?

Lenz

Med nann, ma mamm. Ken vo arru Juluan! Kaset 'm-eus anezañ da Lannuon da bremañ eur bou roz da lakaad war an daol.

Mari

Petra? 'Teus kaset ar babouzeg-se da bremañ fleur? Goud a-walh a rez 'n-eus kemeret da dad her d'ober paotr marchosi 'vel vez laret, da skubañ ar porz da glask boued d'ar lapined, med 'velkent da stokañ deuz fleur.

Juluan

(*O tonñ*). O selled arru on prest da lonkañ ma zeod.

Lena

Med da beh, sapre introudi, out o vond gand ar bodjou-ze?

Mari

Ya, med eur bodjou, gwelet 'teus biskoaz!

Juluan

Damen laret ho-poa din, dimezell, digas dah ive "une botte d'asperges". 'Vel-se pa n'em-oa ket ' botte" oa red din mond da di ar hereer da bremañ unan.

Mari

Ya, genaoueg, sur ar hereer oa ket mad dezañ gwerzañ din eur votez, peotramant, emezañ, ne mann ebed gand eben. 'Vel-se 'm-eus ranket prenañ aneze o-diou.

Juluan

Feiz sur! 'n-eus laret ar hoz kereer-ze din penaoz ne ree ket a asperjez e vije red din mond da g
d'an iliz*, med ze oa re bell. N'eus forz , kavet 'm-eus roz brao bepered, hañ? (*Lena a gemer ar roz*)

Mari

Hag e oas chomet peleh da lostenni gante?

Juluan

Feiz sur, ar varhadourez roz he-deus laret din arozi aneze kentañ ma halljen. Setu 'h on antree
ostaleri nesañ hag evañ tri aperitif ha c'hoaz, 'benn oan arru tost d'ar gêr, e welen aneze krog
blegañ o fenn. Setu 'h on antreet en ti Soazig, traou† ar hra, hag evañ daou vok. 'Vel-se n'int
gweñvet, hañ?

Mari

C'hoaz vez laret, greet 'nevoa an Aotrou Doue eun taol kaer en deiz 'nevoa krouet ar lokard-mañ

Lena

Ya, 'vad, genaoueg 'vel e dreid! Ha peleh emañ ar retorn deuz ma billed a deg mil lur?

Juluan

Retorn? Hañ, ya, retorn ho-po d'ober da baeañ an arozaj pe an arozamant-ze 'm-eus lakeet wa
kont, rag eet oa toud ma arhant da baeañ ar bodjou hag ar fleur.

Mari

Ha bremañ e chomo plantet aze krog 'n e vodjou! Sell! me rafe eun tamm diftretañ d'ar seurt-r
(*Ober a ra*). 'N-eus ket daou wennegad skiant.

Juluan

Me rank ober gand ar ar pez a zo roet din.

Lena

Rostet ma billed a deg mil lur! 'Teus ket ken da lared da vihannañ?

Juluan

Geo, ar fakteur 'm-eus gwelet ive hag e-neus roet din lizerou. Sellet! Unan deoh, dimezell, dig
ho koantig, 'michañs? (*O kemer ar lizer*).

Lena

Hañ! chik! Neuze eh an en tu all da lenn anezañ ha da lakaad ar roz war an daol (*Mond a ra er-mé*)

Juluan

* Notenn evid ar re n'o-deus ket klevet james an overenn e latin. Laret e veze "asperjes me, Domine".

†traou: traoñ

Sellet! c'hoaz zo eur journal 'vid an aotrou. Eur lizer din ive digand ma mamm.

Mari

Eh an da gas ar journal da Bier da lenn. (*Mond a ra er-mêz*).

Juluan

(*E-unan*). Dampred a vo bremañ eh an da gaoud peuh da azezañ da lenn ma lizer.

Ma mabig kêz,

(Sell 'ta, ken buan all he-dije lakeet "Mabig Jezuz"!)

An treou ah a mad amañ. Toud an dud a zo yah, nemed ar vuoh Penngwenn hag an dintin Antonet a-peuret eur yeotenn hag he-deus lakeet anezi da goll he lêz. Laret 'n-eus ar veteriner vije ket hir he hleñved, an dintin a waskenno en-pad ar goañv.

Ar porhell a zo lahet amañ ive pa ne debre tamm ebed ken, (Ne debre tamm ebed ken? med neuze 'marvet gand an naon!). Greet 'm-eus chaousis hag andouill ha digaset dit eun tamm pastez 'n eur koñfitur. Sell amañ ive eur mañdad a ugent real, med arabad vo dit dispign aneze toud asamblez, ha da he eur billed lotiri. (Hañ, hemañ avad ne ran foeltr fout dioutañ, nann, n'houlan ket kleved komz o lotiri, aze vez re a breferañsou; paotred an Nasional a denn plouz berr etreze ha ne bartajont gand ar seurt din-me!

(*Ar vamm hag ar verh o tond*)

Mari

'Hanta! bet 'teus kelou mad deuz ar gêr?

Juluan

Ya, toud an dud ah a mad med ar vuoh Penngwenn a-deus peuret eur yeotenn ha ma zi Antonet, ze 'n-eus lakeet anezi da goll he lêz. Eur porhell maro a zo bet lahet ive, ha neuze digaset din eur billed lotiri.

Lena

Eur billed lotiri? Diskwel hennez din avad! (*O selled*). Sell 'ta! an numero 13. Hennez a dougo ch dit.

Mari

(*Gand fae*). Ya, te 'ha d'ober da fortun aze.

Juluan

Ma fortun? Welloh vije bet din eur chek a ugent real.

Mari

Ya, pe eur pakad butun. Med war ze e vank din mond da zikour ar vatez da dibab ar zaladenn vo prest toud an treou 'benn arruo danvez ar mab-kaer.

Juluan

(*O tond*). Hañ, ya, betegoud e vefe melhwed enne da zac'hañ en goug ar hrag-aotrou-ze!

Lena

C'hoant 'n-eus d'ober goap deuz digourdioh evitañ! Med sell piou 'n-eus bet eur billed lotiri!

Mari

Med te 'teus billejou ive! Kerz da glask aneze rag 'm-eus aon e oa deh an tiraj.

Lena

(*O vond er-mêz*). Hañ ya, eh an da weled peleh emaint. Ma gallfen gonid ar "grollo" da vihannañ!

Mari

Ya, ma dije gallet houmañ gonid eun dra bennag, rag emañ o vond da fortuni gand eur paotr tenn med allaz nebeud a dra d'e heul! Mab deuz eun ti e leh ma zo muioh a voged evid a dan.

Lena

Sell! amañ ma billejou : Numeroiou 29, 63, 110.

Pier

(*O tond gand ar journal*). Hastet buan selled deuz ar billejou. Deh da noz e oa an tiraj. An numero a honnez ar "grollo" : 40 milion!

Mari

(*O sevel he diouvroh*). N'eo ket Doue posubl, memez tra!

Lena

Petra lerez aze, ma zad? An numero 13 eo billed Juluan.

Pier

Juluan? Deuz peleh 'nefe bet an intourdi-ze billejou?

Mari

Digand e vamm sur! Med pas lared dezañ ha ne ouvezo ket.

Pier

Nann, rag petra 'rafe hennez gand ar milionou-ze?

Lena

(*Dezolet*). Prenañ eur wetur gaer, kaerroh evid ma hini.

Pier

Eur wetur da betra? Ne ouvezo biken kondui anezi.

Mari

Marteze e kavo eur wreg d'ober.

Lena

Eur wreg, laran-me ive, daoust piou 'nefe ezomm deuz an toke-ze? Da hortoz-se 'h a da v
pinvidikoh evidon. Sell! 'h an en tu all da harmed; zut war lotiriou! (*Mond a ra er-mêz*).

Pier

Gwir eo avad, ar lotiriou daonet-mañ, e-leh ingali an treou ah eo leuriañ aneze a reont.

Mari

'Hanta mad! sell aze eun okazion dim bremañ da displeuriañ ha da ingali an treou.

Pier

Daoust da ingali petra? Mil malloz ruz war lotiriou!

Mari

Azez, azez 'n ez koazez. Sell! ma kontin dit petra 'h on o soñjal. 'H ez da lampad med ingal 'zo.

Pier

Petra out o soñjal?

Mari

Soñjal penaoz Juluan vefe ket eur prenañ fall gand ar bern arhant se.

Pier

Eur prenañ fall da biou?

Mari

D'on merh!

Pier

(*A ra eur lamp*). Pa... pa... te... te... zo kouezet war da benn? Pe 'teus tapet e gleñved! Arru s
evitañ! Kredoud komz deuz Juluan? 'Oar ket ped eur vez pa zon ar hreisteiz!

Mari

Ne laran ket dit vefe deuz an deiziou kentañ a'r zun, med pa vo sellet, n'eus ket toud ar siou hag
pried re fin n'eo ket êzet ive, ha gand ar bern arhant-se eo 'vellkent eur fortun gaer, 'kichenn an
a zo o vond d'arruoud aze a zo eur hrak, med n'eus nemed avel d'e heul.

Pier

Hañ, te! memez tra, a zo dallet gand arhant ar milionou a vank dit. Ya, gweled a rez avantajo
greiz-toud.

Mari

Med n'out ket kap da vond neb leh heb arhant, ha gand arhant 'h ez partoud.

Pier

Ya, nemed d'ar Baradoz. Di n'i ket gand arhant.

Mari

Ba! ze vo gwelet goude, med amañ n'eus ket amzer da goll, a-raog ma vo arru an aotrou-ze. A vank dim bezañ intentet gand on merh (*O huchal*): Lena! Lena!

Pier

Med... med Lena ah a da zodi evel just!

Mari

Hast buan klask petra da lared dezi. Red eo dim bourrañ dezi he fenn pa'h eo evid heh avantaj pa'h eo minorez e sento diouz he zud.

Lena

(*O ton*). Petra zo, ma zud? Gustav zo arru?

Pier

N'eo ket, n'eo ket. Deus da azezañ amañ. Eun afer important ha n'eo ket gand Gustav a zo da ir amañ dioustu.

Mari

Ya, me gred, plah bihan, e senti deuz da dud peogwir ne glaskont nemed da avantaj.

Lena

Ya, goud a ran penaoz eur bugel savet mad a gle senti deuz e dud. Med petra zo neuze?

Pier

Feiz sur, 'h an da lared dit, n'eo ket Gustav a vo da bried.

Lena

(*'N eur lampad*). O Doue! 'Mo ket ma Gustav? Piou 'n-eus laret se?

Mari

Nann, nann, da dad 'n-eus klevet re a dreou diwar-benn ar paotr drol-ze. Kavet meum eun all kalz welloh, pinvidig-mor, eur bern braz a arhant dezañ.

Lena

Med an arhant ne reont ket an evurusted. Me eo Gustav 'blij din. Ha piou ho-pefe kavet welloh?

Pier

Eur paotr fur, ha koant ive pa 'nefe gwalhet e vizaj. Anavezoud a rez anezañ ervad, gon gantañ ar "grol". Juluan, ar mevel braz ahann.

Lena

(*O lampad*). Petra? Petra? Juluan? Biken na kant vloaz goude, biken! Kentoh mond da seu n'eus forz e petore kouent. Zoñj pegen diwezad eo hennez!

Mari

(*O kregi 'n he daouarn*). Med, selaou, sell! welloh eo eur pried eun tamm diwezd evid unan re Gustav a zo re futet. Na vi ket kap da vond neb leh na d'ober marhad ebed heb goud de 'Kichenn da Juluan, a ri ar gont a gari; ne vo ket o fourrañ e fri en kement kastolodenn vo touc neuze d'ez heul hennez a 'n em desalo tamm ha tamm hag a 'n em gavi "à la page".

Pier

Dioustu e halli prenañ eur wetur vrao ha peogwir ne ouvezo ket kondui, 'h i da vale leh a gar da Juluan a chomo er gêr da skubañ an ti ha da blantañ saladenn.

Lena

A! nann! nann! Hounnez n'eo ket eur vuhez, me o redeg ma-unan evel eur goz intañvez, ma f er gêr 'vel eur penn ki. Ze n'hall ket mond.

Mari

Med geo, an treou-ze a 'n em dreso. Soñj penaoz ah ez da vezañ eun itron binvidig. Ha pa vi l er "grol", ma kerez, e tivorsi.

Pier

(*O sevel*). Ya, prometet e-teus senti deuz da dud pa ne glaskont nemed da eurvad.

Lena

(*O sevel*). Ha petra vo laret da Gustav bremaig pa arruo?

Mari

Me 'n em gargo da lared dezañ ar pezh a zo d'ober.

Lena

O! sellet! Me 'h a d'am hambred da ouelañ ha da zoñjal.

Pier

(*O vond er-mêz*). Me, sellet, ah a da lenn ma journal.

Mari

(*O vond er-mêz ive*). Ha me 'h a da gemer an êr eun tamm ha da zoñjal petra da lared d'ar p yaouank-se pa arruo.

Odet

(*O tond*). Arsa! Daoust hag-eñ eo prest an treou partoud da digemer an aotrou koant-se? Ha p emañ danvez ar wreg yaouank? O 'n em fichañ, sur. Lorh zo enni gand he fortun. Tapoud ra g ive, red eo lared.

Juluan

(*O tond*). Sell aze, Odet, prest eo ar zaladenn. Tennet 'm-eus ar buzug hag ar melhwed grosañ loched avad ne zac'hfont ket en goug den ebed.

Odet

Sapre Juluan! Te n'out ket eur paotr tener, hañ! 'Rez ket muioh a van o kaoud loched 'n ez sala
'vid o kaoud eun touseg poah war da batatez.

Juluan

Feiz, ze zo boued kov toud pa vez ket vijel. Ha sell 'ta! petra 'zo 'n em godell amañ, digaset din g
mamm? Hemañ 'h a da vond er poubel 'vad, pe ma kerez az-to anezañ. N'eo koustet mann ebed
ne gousto mann ebed dit ive.

Odet

(*O kemer ar billed*). Feiz 'vad, ma ne rez mann ebed gantañ e kemerin anezañ a-walh. O! sell 'ta
numero 13! Hemañ zo eun numero fall, med pegoulz emañ an tiraj?

Juluan

Fidamdoulle, me n'ouzon ket ze 'vad! Jeuiou dibrofit!

Odet

O Doue! santoud a ran c'hwez ar rost. 'H a da vezañ devet ar hig er forn. (*Mond a ra er-mêz*).

Juluan

(*O c'hoarzin*). Hañ, feiz! Neuze, ma vez devet ar hig e vo eur hras kaer d'an aotrou yaouan
kaoud melhwed da dibri gand e zaladenn. 'H an da weled.

Gustav

(*O tond gand fleur*). N'eus den? Ola 'vad? 'Mañ ket Lena, ma dousig koant, amañ? Na danvez
zud-kaer o hortoz ahanon? Marteze n'on ket arru abred a-walh?

Mari

(*O tond*). Ola! Arru eo!

Gustav

Demad, demad! Gand kalz a doujañs e teuan d'ho saludi. Marteze on eun tamm diwezd?

Mari

(*Gand fae*). A! abred a-walh evid ar pezh ho-peus d'ober.

Gustav

Hañ? Med peleh emañ Lena, ma roin dezi ma fleur?

Mari

Lena a zo 'n he hambr. N'he-deus foeltr ezomm ebed deuz ho fleur.

Gustav

Ola 'vad! Koulskoude int brao.

Mari

Ya, 'veldoh ive bravoh evid welloh.

Gustav

(*Sebedennet*). Biskoaz kemend-all! Med petra zo? N'e-peus ket an êr da vezañ war ho tu mad.

Mari

Ma feiz, nann, paotr yaouank, red eo din lared dah penaoz daoust ma zo bet eur bloavez zehor eet kalz a dreou en dour hag hoh eured a zo eet en dour ive.

Gustav

Hañ? En dro-mañ 'vad, e skoet eun taol 'n em halon. Med petra 'm-eus greet evid meritoud kemañ?

Mari

Feiz sur, ma merh he-deus kavet kalz pinvidikoh evidoh, ya, unan hag e-neus eur bern arh Gand se n'he-deus mann d'ober ganeoh ken. Achu.

Gustav

An arhant a zo tentuz, med ne reont ket an evurusted beb tro. Diwallet ho-pefe keun.

Mari

Ze vo gwelet goude, med da hortoz e laran deoh kemer toull an nor ha toull ar porz goude kenavo!

Pier

(*A deu*). Sell aze, Mari, greet e-teus da daol. Laret 'n-eus dit : « Diwallet ho-pefe keun! »

Mari

Al! dalh da vond bepred. Peleh emañ Juluan?

Pier

Aze emañ, eh an da esaad domesaad anezañ.

Mari

Mad, mad, me 'ha neuze da gerhed Lena.

Pier

(*O respeti*). 'Vel-henn eo dastum gand an daouarn ar pez a vez bet ruillet gand an treid. Juluan, tosta amañ (*Juluan o tond*), deus da azezañ. Sell! ma refom eun tamm kaoz.

Juluan

Hañ! mad eo din azezañ avad, Pier. Kenkoulz paeet e vin evel 'n em za.

Pier

Ya, eun dra bennag important e-meum da lared dit. Lared dit pegement a istim e-meum evid pa'h out eun den a skiant; plijoud a rez dim toud ha me zoñj out kontant ive da chom ganim?

Juluan

Ya, 'vid ma ven ket re difretet gand Mari. Hirie beure eo darbet dezi bezañ distaget ma fenn di ma diouskoaz.

Pier

Ba! Hounnez a oa o c'hoari.

Mari

(*O tond gand Lena*). Alo, Lena, kemerom beb a gador hag azezom da 'n em intent. Kerz aze a-fas paotr yaouank chik-mañ ha sellet an eil deuz egile.

Juluan

Hañ! ya, me blij din gweled plahed yaouank o selled eün diouzin, med paz selled a-gorn.

Lena

Me rank selled da gad an nor o soñjal gweled Gustav.

Mari

Alo, Gustav 'm-eus roet e gont dezañ . 'Dosteo ken amañ.

Juluan

N'eo ket posubl! Neuze, dimezell, oh 'vel vez laret, eur goz votez koad heb he far.

Pier

Ba! Ba! Kaoud a raio eun all. Te, paotr, a zo arru poent dit zoñjal eun dra bennag ive.

Juluan

Ober a ran avad; me zoñj en kalz a dreou, surtoud en noz pa ven oh huñvreal.

Mari

Penaoz? Soñjal a rez en Lena amañ a-wechou ive?

Juluan

Hañ, ya, 'vad. A-greiz-toud 'vel-se, ha hi marteze a zoñj ennon ive.

Lena

Ya, a-wechou, med...

Mari

Setu aze dija seblant vad.

Pier

Ya, Juluan, arru out en noad da dimezi.

Juluan

(*A ra eur lamp*). Me, dimezi? Hañ, ze, biken bepred. Hennez eo an diwezañ deuz ar marhajoù : 'r leuriañ gand merhed!

Lena

(*Dezolet*). Sell aze, ma zud.

Mari

Ya, med Juluan a zo o farsal.

Juluan

(*Reud*). Hañ, n'on ket avad; me viro ma liberte da vond leh a garin, ha ma 'mez eur wreg goulennet diganin : « Peleh out bet? Ped bannah 'teus evet? » Teu! teu! teu! Nann, ma jeu ma-una

Pier

Da jeu da-unan? Hounnez n'eo ket eur vuhez, e-unan 'vel eur penn ki, hano ebed nemed paotr-yaouank pe e galleg "célibataire endurci", toud an dud en-pign ouzit.

Juluan

Ne ran ket a forz piou a vo en-pign ouzin, beteg vo ket eur plah. Nann, prometet 'm-eus war b ma buoh Penngwenn du-mañ penaoz ne gemerjen biken eur wreg. Nann, biken na kant v goude biken.

Lena

(*O sodi*). Sell aze, ma zud, bremañ 'h eo me eo a vo "célibataire endurcie", pa 'peus rañvo egile ha hemañ dimez ket.

Mari

Ro peuh! ro peuh! Juluan 'n-eus ket laret e her diwezañ, pa vo laret dit, ma faotr bihan, piou en c'hoant dit, ne zouzi ket. Soñj, on merh Lena amañ.

Juluan

(*'N eur lamp*). O! Doue! C'hwi, dimezell, a zo kontant da vezañ gwreg din?

Lena

Ober 'vel pa vefen, pa 'm-eus prometet senti.

Juluan

O! damen a vo med neuze e vefem kerent chik, ze, hañ! Fidamdoulle, koulz eo din profitañ c an okazion.

Mari

(*Stad enni*). 'M-oa ket laret dah? Setu nim akord : kerent ha mignoned, ha mad na treou.

Pier

Sell aze, paotr Juluan, 'h ez da vezañ mab-kaer ahan. Toud an dud zod ganit.

Lena

(*A-gostez*). Toud, nemedon, rag sell amañ eun dimezi!

Mari

Arhant az-to bepred, ha bremañ nim a 'h a da lezel ahanoh ho-taou d'ober ho kaoz.

Pier

Ya, Julig kont kaoziou brao da danvez da wreg, 'vel reen-me da Vari amañ a-raog ma dimezet. (*Mond a reont er-mêz*).

Juluan

(*O tostaad da Lena*). Hañ, bremañ neuze, Lena, em-eus d'ober tapoud an tu pe... domes ahanout. Kontañ kaoziou brao dit. Heu! Heu! 'Vid ar bloaz eo bet seh an amzer, hañ! Ken a c' d'ar zaout.

Lena

A! 'benn zul, ze eo toud ar pezh a-teus da gontañ?

Juluan

N'eo ket, me oar treou c'hoaz. Klevet 'm-eus penaoz e Lannuon eo eet ar "port de plaisance" dour hag e vo greet eun all war Venez-Bre. Eno bepred n'aio ket en dour!

Lena

Hañ! Pa laran, sell amañ eur goñversation! Eh an-me d'ober eur "mariage d'amour" gand hem.

Mari

(*O tond*). Iskuzet ahanon, med red eo dim trohañ ho haoz deoh, tud yaouank.

Pier

Ya, krog e oam d'ober ar paperou hag e-meum ankouaet goulenn diganit, Juluan, peleh emañ villed lotiri.

Juluan

Fidamdoulle, me n'onn ket se, 'vad, na forz 'ran ket ive.

Mari

Petra? Petra? 'Teus ket 'velkent kollet da villed?

Pier

A! nann! Hast buan klask ar billed-se pa dalvez eun tamm mad muih evidout. Te n'out m

heb hennez!

Juluan

Me gav din 'm-eus roet anezañ da Odet pa oa koustet mann din na mann ne rajen gantañ.

Pier

Sell! achu paterou neuze. Kenavo d'ar "grolo"!

Mari

O! amprevan, ar seurt dit-te glefent ket bezañ dastumet diwar an hent keid ma vez toñseg vale. 'Meum ezomm ebed ouzit heb da villed. Ha peleh lamped bremañ?

Lena

O! tud paour! bruzunet ho-peus ma buhez din! Laret 'm-oa dah pell 'zo e oa hemañ gena evel e dreid. Ha rañvoayet an hini a blije din! Bremañ 'm-eus kont ebed ken nemed mond c'gouent, ya, da seurt bitrouillez, n'eus forz peleh. Kenavo, ya, kenavo toud. Achu (*Mond a ra er-m*

Mari

Gortoz! gortoz c'hoaz, plah bihan. Ma 'n-eus roet ar billed, marteze zo moyen da adka anezañ.

Juluan

Hañ, ya, med me n'in ket ken da hoari. Arru 'm-eus dreist ma fenn amañ.

Pier

Geo! geo! eun taol ese c'hoaz. (*O huchal*). Odet! Odet!

Odet

Oan o tond d'ar red da lared deoh em-eus gonezet ar "grolo" gand an numero 13.

Mari

Ya, med gand billed Juluan. Gand se e vank deoh return hennez d'e berhenn.

Odet

Ola! Ola! Eun dra roet eo roet. E oa o vond da skei anezañ er poubel pa 'n-eus roet anezañ. evitañ!

Pier

O! sapre babouzeg! Bezañ e-teus skiant nao forhell!

Juluan

Hañ, tra-walh en dro-mañ, unan o lared din on genaoueg 'vel ma zreid, eun all o lared din m skiant nao forhell! Med aze a zo eun diferañs. N'ouzon ket pehini da gredi. Ha bremañ pa 'p digaset c'hoant dimezi din, emañ danvez ma gwreg o vond da seurez! Hañ, me 'h a da gaoud f digourdi, 'vad.

Nann! nann! chomin ken da vevel amañ da vezañ sachet ha boutet. Me 'h a d'ar gêr da lared o mamm biken ken prenañ billejou lotiri. Kenavo. (*Mond a ra er-mêz*).

Odet

(*O rei he davanañjer*). Ha me a oa justamant o vond da rei ma davanañjer deoh ive, Itron. Me n'on ket o vond da chom da vatez amañ. Gand ar milionou-ze e savin eun ti bihan war ar mêz, e prenin tamm gwetur a deir rod da vond da vale, ha marteze e kavin eur hoz intañv deuz ma noad ha e fom en "gaec" 'vel 'mañ ar hiz bremañ. ha toud se gras d'ar billed lotiri.

War-ze, kenavo. (*Mond a ra er-mêz*).

(*An daou bried a van aze semplet*).

Mari

N'on ket kap da respont den ebed. Trohet eo ar gomz din.

Pier

Ya, 'vel vez laret, trohet ar chek dim. Ha me gred eo te a zo kaoz, pennbouellet e-teus toud ar o redeg war-lerh an arhant.

Mari

Ma 'm-eus bet tor, Pier, te 'teus ive. Me gred om puniset gand Doue o vezañ greet re a hoap o on mevel mad, 'nevoa hano 'bed nemed "genaoueg ahann, babouzeg aleshont". N'eo ket mad o fae war den ebed, ha bremañ 'h om dilezet amañ. Den ne zello diouzim.

Pier

'Hanta, neuze, ma meum sachet ar harr war on hein, meum nemed 'n em zikour on-daouadsevel anezañ.

26-7-89.